

## LENNEGEZH

### DANVEZ PROGRAMM BARZHONIEZH

Barzhoniezh a gaver e pep yezh, e pep sevenadur, ha ne dremen ket hor yezh hebiou d'ar reolenn-mañ. Korpus diglok al lennegezh krennvrezhonek a zoug ennañ un teñzor a hengoun barzhoniel, ha petra bennak peuzankounac'het e vefe, hemañ a chom sevenidigezh pennañ er yezh vrezhoneg. Er c'hentelioù-mañ e welor pegen uhel eo bet kaset al lennegezh vrezhonek gant he barzhoniezh «enklotennet» eus diwezh ar grenn-amzer, hag e deroù an oad modern, betek an amzer a-vremañ. Keñveriañ a reor an hengoun barzhoniel breizhat gant an hini kembraeg ha gant sistemoù gwerzaouiñ all dre ar bed-holl. Pleustriñ a reor ivez ster ha talvoudegezh ar varzhoniezh en un doare hollek :

- **Lun:** Petra eo ar varzhoniezh? / Ivonet Omnes, distagiñ ar varzhoniezh
  - **Meurzh:** ar varzhoniezh kembreat 1 (gwerzaouiñ) / Maen moger ar vered kozh e Ploubêr
  - **Merc'her:** Buhez Mab-den
  - **Yaou:** Istor ar varzhoniezh e Kembre hag an Eisteddfodau / Buhez Santez-Nonn
  - **Gwener:** Ar varzhoniezh taolmouezhiek / Atalier skrivañ
- War-lerc'h displegadenn pep prantad e c'hello ar stajidi eskemm ha tabutal war boent-mañ-poent.
  - Lakaat a reor ar stajidi da ziefennañ ha da skrivañ barzhoniezh o-unan hervez sistemoù barzhoniel disheñvel.
  - Pleustret e vo war ar yezh komzet. O tennañ splet eus daou du ar varzhoniezh, an tu lennek, pa c'houlenn diouzh ar barzh gouzout c'hoari gant ur c'heriaoueg ledan ha mestroniañ don ar yezh hec'h-unan, hag an tu pleustrek, a ro lusk ha buhez da labour meizañ bet kaset gant ar barzh er yezh komzet. Gouzout pleustriñ (e holl sterioù ar ger) ar varzhoniezh a zo an doare gwellañ da wellaat dibaouez brezhoneg an-unan. Setu perak e kavo ivez ar stajidi alioù evit kenderc'hel da zoonaat o gouiziegezh war ar varzhoniezh o-unan-penn.

*Kinniget e vo ar c'hentelioù gant Alan Kersaudy: Studier war ar brezhoneg e Skol-Veur Roazhon, o paouez echuiñ e drede bloavezh e Skol-Veur Aberystwyth, lec'h m'en deus studiet ar yezh hag ar varzhoniezh Kembraeg.*

**EVEZHIADENN :** *Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.*

*Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.*